



Rakstummadur  
« Mestroniañ brezhoneg  
da yezh kelenn »

Préformation  
« Maîtriser le breton  
comme langue  
d'enseignement »



KELENN a ginnig ur stummadur a glot gant ezhommoù ar studierien a zo e soñj mont da gelenn er skolioù divyezhek brezhoneg-galleg kentañ derez pe eil derez met n'o deus ket al live ret e brezhoneg.

KELENN propose une formation linguistique dont l'objectif est d'acquérir les compétences nécessaires à l'enseignement bilingue breton-français dans le premier ou le second degré pour les candidats qui ne possèdent pas encore les compétences suffisantes en breton.

Kelenn – 3 straed Vañde – 29000 KEMPER

☎ 02 98 95 55 99

☎ 02 98 95 71 91

✉ kelenn2@wanadoo.fr

## Danvez ar stummadur / Contenu de l'enseignement

### Modul deskiñ hag en em varrekaat e brezhoneg (480 eurvezh)

Implij pleustrek eus ar yezh komzet ha skrivet evit tizhout ar barregezhioù ret evit heuliañ ar stummadurioù war ar vicher kelenn divyezhek er c'hentañ derez pe en eil derez.

1

### Module d'apprentissage et de perfectionnement en langue bretonne (480 heures)

Pratique active de la langue orale et écrite pour acquérir le niveau de compétence exigé par les formations d'enseignants bilingues dans le primaire ou le secondaire.

### Modul kizidikaat d'ar c'helenn danveziou e brezhoneg (210 eurvezh)

Implij ar brezhoneg evel yezh kelenn an holl zanveziou, en holl liveou eus ar skol-vamm d'al lise. Skeudenniñ an degouezhioù kelenn en em gaver ganto en implij pemdeziek eus ar brezhoneg evel yezh kelenn : barregezh war implij ar yezh, krouiñ ha sevel dafar kelenn, terminologiezh...

2

### Module d'introduction à l'enseignement disciplinaire en langue bretonne (210 heures)

Utilisation de la langue bretonne pour enseigner toutes les disciplines à tous les niveaux d'enseignement, de la maternelle au lycée.

Présentation des problématiques rencontrées dans le cadre de l'utilisation du breton comme langue d'enseignement : compétence linguistique, création et élaboration d'outils didactiques, adaptations terminologiques,...

## Kounskrid studi (90 eurvezh)

Sevel un teuliad studi pe un teuliad e liamm gant ar sevel danvez kelenn diwar elfennoù na c'heller ket implij en o stumm orin er c'hlasoù (enrolladennoù, kontadennoù pobl,...).  
Dielfennañ ha souten e deuliad dirak ur juri.

3

### Mémoire d'étude (90 heures)

Elaboration d'un dossier d'étude ou d'un dossier sur la production de matériel pédagogique à partir de matériel non exploitable en l'état (enregistrement, conte populaire, ...)  
Analyse et soutenance devant un jury.

### Stajoù pleustrek

5 sizhunvezh staj en ur skol, skolaj, lise, kevredigezh pe embregerezh e-lec'h ma reer un implij pemdeziek eus ar brezhoneg.

4

### Les stages professionnels

5 semaines de stage en école, collège, lycée, association ou entreprise utilisant la langue bretonne dans leur activité quotidienne.

Padelezh ha lec'h ar stummadur

**930 eurvezh** kelenn war ur bloavezh (30 eurvezh ar sizhun).

e KELENN e Kemper  
**eus ar 6 a viz Gwengolo 2010**  
**d'an 13 a viz Mae 2011**

Durée et lieu de la formation

**930 heures**  
(30 heures par semaine).

à KELENN à Quimper  
**du 6 septembre 2010**  
**au 13 mai 2011**

## An doareoù enskrivañ / L'admission en formation

Bezañ paket un diplom BAC+3 ha bezañ kroget gant an deskiñ brezhoneg.

Ar bodad a c'hell degemer ivez stajidi paket un diplom BAC+2 ganto met e soñj prientiñ un diplom BAC+3 dre lizher e-pad ar stummadur.

Tutet e vez an danvez-stajidi diwar teuliad, eskemm dre gomz ha priziadennoù.

Les candidats doivent justifier d'un diplôme BAC+3 et avoir des notions de breton.

La commission peut aussi accepter des stagiaires possédant un diplôme BAC+2 et prêts à préparer un diplôme BAC+3 par correspondance pendant la formation.

Les recrutements se font sur dossier, entretien et évaluations.

## Koust ar stummadur / Tarif

### Den dilabour :

Kemeret e vez e-karg ar frejoù stummañ gant ar Rannvro.

Ar stajiad a c'hell, diwar kriterioù termenet gant ar Rannvro, bezañ gopret e-pad ar stummadur.

### Goprad un embregerezh :

Kemeret e vez ar stummadur e karg pe gant an implijer diwar steuñv stummañ an embregerezh, pe dre ar stummadur dibaouez (CIF).

### Demander d'emploi :

Cette formation est subventionnée par le Conseil Régional de Bretagne, le coût de la formation est pris en charge par la Région.

Le stagiaire peut, sous certaines conditions, bénéficier d'une rémunération par la Région.

### Salarié d'entreprise :

La formation est prise en charge soit par l'employeur sur le plan de formation de l'entreprise, soit par les fonds de formation (CIF).

